

Koñfiteor

Da ziwall a zo diouzh ar baotred vihan !

Traoù divalav ha drouk int ha krabanoù furch-difurch dezho. Sachañ a reont war blev ar merc'hed, evel-henn e vez graet ganto : klask a reont ur plac'hig, unan sioul ha meur a dra zous enni kement hag ober. « Klevit anezhi o kanañ da gas an nec'h diwar he zro ! Pegen temptus... » Hag int ha tostaat, war o strakig, ha sachañ war he blev neuze ha pa vije leñv ha gweñv da glevet ha trepan da gaout digant ar vamm pe an tad.

Gouzout a ra ar merc'hed. Kelenn a reer ac'hanomp abred ha deskiñ a reer deomp en em zifenn. Ne vern, sachadeg a vo, abred pe ziwezhat, sachadeg a vez atav. Ne fell ket d'an dud gouzout hiroc'h : an natur, an anien eo ha n'eo ket evit talvezout da bec'hed Eva nag evit kastizañ ar merc'hed evel Santez Barba e reont an dra-se. Nann ! Nann ! Nann ! Tavit deomp gant ho kozh rimadelloù, mar plij :

Sachañ war ar blev
N'eo ket c'hoari,
N'eo ket c'hoari,
Sachañ war ar blev,
N'eo ket c'hoari eo !

Eo ! Ret eo dezho sachañ !

Da ziwall a zo diouzh ar baotred vras ivez : ar vedisined, ar gelennerien, ar valtouterien, ar vilinerien, ar veskonted, an tadoù ! Paotred a zo e pep lec'h, den n'en deus c'hoant gwelet anezho met ne c'heller ket tremen hepto. Ret eo din kontañ, un tammig kempenn a zo d'ober. Marc'harid eo va anv. Marc'harid abalamour da'm mamm-iou, Marc'harid. Ret din toullañ war gevier va zad ivez : dizonet on, pell a zo, unnek vloaz on ha n'eo ket pemp. An tadoù ne welont seurt avat, sevel a reont tourioù war bigerniel ha kraouiañ o merc'h en tour uhelañ da selaou ar mor o trouzal hag ar brini o krozal : koa, koa, KOA ? Embann a reont lezennoù diouzh an druilh ha reizhañ ho prezhoneg, ho sioù fall, ho puhez. « Ha graet eo da labour-noz ? Abaoe peur emaut ouzh ar pellgomz ? O ! Pennad ! O ! Putenn c'hast ! O... c'h ober petra emaut er sal-dour c'hoazh ? ». Ha klemm abalamour d'al litradoù dour az a ganin, klemm abalamour d'ar soavon-blev, klemm a ra va zad atav. Ne oar seurt eus ar blev ken ha ne oar ket hiroc'h diwar-benn ar merc'hed am eus aon.

Ar vi diwar va mamm on-me hag heñvel eo va blev ouzh re va mamm hervez va zad. N'eo ket gwir. Diouzh gwelet ar poltred a zo a-ispilh a-zioc'h va gwele e oa heñvel he blev ouzh re va zad kentoc'h, met poltriji all a zo. Da Sul ez an da welet va mamm asambles gant va zad, leñvañ a reomp ha chom a reomp da gantreal er vered da-c'houde. Selaou a reomp an Anaon rak ret eo pardonin d'an Anaon, Doue a raio. Noz-deiz e klevan anezho. Ober a reont o hentoù e-barzh va jardinoù ha dont a reont war va c'haoz, dont a reont en va spered, atav o devez

un dra bennak da gontañ ha kentelioù da ober. Ret eo pardoniñ d'ar re all ivez. N'eo ket ur c'hras eo bevañ en o ser, n'eo ket e vent drouk met ne ouzon ket an tu outo. Selaou a ran neuze. Da Verc'her ez an da welet Gaelle, an ortofonourez (selaou eo a blij din, n'eo ket kaozeal) ha Youenn, ar medisin, abalamour d'ar barradoù imor am bez c'hoazh. Kalz imor a zo ennon emezo, abalamour d'ar gwad a zo dindan va ivinoù. Leun-kouch eo va fenn ivez ha digempenn. Youenn a oar ha ret eo din mont da welet anezhañ bep sizhun, setu va finijenn.

Yaouank-flamm eo Youenn, ur pezhiaed den eo, gwall chaotret ha strobet abalamour d'e zivrec'h re hir. Jentil eo Youenn, gouzout a ra prederiañ ouzh an digalon, an dristidigezh, an imor ha kleñvedoù spered all. Kleñvedoù n'eus ket diouto douetus pa n'eus anv brezhonek ebet dezho. Degemer a ra an dud en ur sal vras, gwenn-raz ar mogerioù anezhi. Nebeut a arrebeuri a zo ha netra binvidik enno war-bouez an daol marteze. Un daol gozh eo, koad ouzh hec'h ober, paperachoù a-strew warni hag ur poltred ne c'hellan ket gwelet : e zous, e vugale, e vamm pe e gi ? Ha Youenn en tu all d'an daol.

Bep tro e laka ac'hanon da gontañ un dra bennak plijus bet graet ganin : kaozeal eus an amzer a zo, eus un amzer a zo bet, Marc'harid war an aod, Marc'harid en Arvorig, kammedoù kentañ Marc'harid war... ha bep tro an hevelep goulenn da-c'houde :

- Imor a zo ennout, Marc'harid ?
- Ya.
- Imor vras ?
- N'ouzon ket, penaos gouzout ?
- etre 0 hag ∞ ?

—... ∞ - 1.

Ha leñvañ druz a ran neuze, bestediñ gant an digalon ha klask displegañ. Ouzhpenn kalet eo ober an dra-se met ret eo din kontañ emezañ, ret din displegañ ar penaoz hag ar perag, ret din pasaat, krañchat, rechetiñ ha ret e vefe din lavaret da'm zad. Lavaret petra, n'ouzon ket gwall vat met ne c'hellan ket. Va zad n'eo ket paotr fall moarvat, met ne selaou ket, reolenniñ va buhez a ra atav. Re verr va dilhad, re laosk va frezeg – re a c'halleg ! –, re lugut ez on. Atav e chom dalc'het va mouezh e toull va gouzoug. Ha Youenn hag e zremm Mona Lisa war-lerc'h, ur santig plastr, echu an abadenn.

N'eo ket ! Goulennoù va zad c'hoazh : « Mat eo bet ? Vad a ra dit ? » Ha strak ha bourbouilh an oto da-heul. « Marc'harid ? Lavar un dra bennak 'ta ! » Unnek vloaz on, roget eo va chupenn didalvez, toull et eo va bragez nevez, va gerioù zo toull ha va brezhoneg zo fall ha ret eo din lavaret un dra bennak.

*

* *

Ne fell ket din kaozeal. C'hoant am eus chom en va c'hambr, bro gozh va daeroù. C'hoant am eus kuzhat rak me, Marc'harid, a sav kleuzioù kaer ha karout a rajen souchañ dindan va dilhad gwele, laosker ar bed d'ober e dro ha n'eo ket terriñ va zav evit reiñ digor d'ar medisin. Gouzout a ra an ortofonourez pegen diaes eo din. Gak on. Ganti em bez gerioù hir ha dianav da zistripañ hag ober a ran diouzh va gwellañ met va stripoù n'int ket koulz ha stripoù ar re all. Re a draoù am eus bet da lonkañ ha re a

draoù am eus da gontañ evit doare. Dont a ra ar gerioù, ha gerioù divalav a-wechoù, met chom a reont stanket en va c'horzailhenn ha mont war o giz en diwezh. Toutek.

Er sizhun all e oa bet roet ur c'haier bihan din gant Youenn. Va zad an hini eo en doa lavaret dezhañ e plije din skrivañ, kontañ traoù en va c'haieroù. Da ziwall a zo diouzh an tadoù. Ret eo din skrivañ eta, Youenn a lenno, va zad a c'hello lenn ivez ma fell din, den all ebet. Skrivañ ar pezh a lavarjen ma c'helljen lavaret fraezh : an aon, an imor, ar skuizhder, ar c'hwez, an traoù kriz ha divalav a zo bet. Kontañ va mamm hag he fenn divlevet. Emaon o vont da gontañ istor blev ar Bretonezed eta. Gant blev va mamm ha blev an holl verc'hed all emañ an dalc'h a gav din. Stlejet o deus anezho war-bouez o blev hag ar feiz hag ar vro hag ar brezhoneg da-heul. Gouzout a ran ne gredo den ar pezh am eus da lavaret. Va zad ne gompreno ket, Youenn ne gompreno ket kennebeut ha reiñ a raio din louzoù c'hoazh. N'on ket klañv avat. Ne vank greunenn ebet en va chapeled : cogito, ergo, pa ri ti to. Cho !

Gutu, gutu, Mari spilhoù...

Mamm-iou va mamm-iou a oa Chan hec'h anv. Ret eo din kregiñ ganti p'ez eo gwir eo bet ankounac'haet ar re all, tout ar merc'hed all a oa bet en he raok. Ne ouier ket peur e oa bet ganet Chan na peur e oa marvet. Tri aotrou a oa c'hoazh ha teir stad : beleien – nebeut –, noblañsoù – nebeut –, ha tout ar re all, an trede stad, da lavaret eo ar stad fall. Bevañ brav a rae ar vondianed, turkañ a rae ar beizanted, loeniñ a rae al loened ha mervel a raent holl poent pe boent abalamour d'ar grip, d'an tifuz, da vleiz ar geraouez ha d'un toullad gwalleurioù all a zo da lenn en va c'haier istor mar kirit.

Chan a oa ur plac'h treut-kagn, sec'h da ober tan. Laeret e oa bet pikiji en ur foenneg bennak evit ober he divesker ganto. Ur plac'hig sentus e oa bet Chanig, ur plac'h a feiz : krediñ a rae e oa pec'hed nezañ da Sadorn da noz ha kribañ he fenn da Sul, krediñ a rae e oa droug da erruout pa gleve ar piged o c'hragailhat. Desket e oa bet he c'hatekiz ganti eta, graet he fask kentañ hag an eil hag an trede ha tout ar re all. Diouzhtu e oa bet kontet ar merc'hed dindan ar yev dezhi, ar merc'hed gwallgaset, skrapet, gwallet, lazhet gant ar baotred ha war-gan atav peogwir edo ar bed war-gan c'hoazh. N'eo ket displegañ a oa d'ober, kanañ, rimadellañ a rae an dud. Klask a raent lakaat reizh er baotredigoù memestra, met n'oa ket a-walc'h evel-just. Nann, n'oa ket a-walc'h

reizhañ ar baotred vihan ha reizhet e veze ar merc'hed bras da-c'houde. A-hed ar wech e oa bet prederiet an dud gant kundu ar merc'hed. Bep Sul e veze embannet hag adembannet. Reiñ gouzoug a rae an Aotrou person er gador sarmon, sachañ war e vouezh a-bouez fregañ e c'henoù : « Va mallozh war ar merc'hed koant a zo kiriek d'an traoù vil graet gant ar baotred yaouank. »

Kudurun ! Hag an diskan e-touez an dud a-hed ar sizhun : en ostalerioù, er beilhadennoù, en tiez dirapar, war ar marc'hallac'h... Doue a gar ar begoù bras. Kelenn ar merc'hed diwar-goust ar merc'hed all a veze graet dija ha tragaer a draoù divalav a veze kontet diwar o fenn. Diwar-benn o dilhad, o doare, o dimeziñ, o zremenvan hag o blev a oa d'an holl, da Zoue, d'o gwaz, d'ar barrez ha n'eo ket dezho. Enor an dud eo a oa e blev ar merc'hed. O feiz hag o renk a oa kuzhet brav e-touez an nez hag ar c'henn ha paket, goloet e oant bet gant aon n'aje ar bed blevenn-ha-blevenn. War don Kêr-Iz pe war an ton a gared e veze desket d'an holl gwelet ar merc'hed a-zoare diouzh ar merc'hed fall :

« Na sellit ket ouzh blev ar mezvirezed, un druez. Diwallit diouzh ar merc'hed digoef hag ar sorserezed a oar latin, a oar skrivañ ha lenn hag ampech ar beleg da lavaret an oferenn. Gwelit koefoù lien gell ar paourezed kentoc'h, gwelloc'h ganto chom divoued eget mont digoef. Gwelit ar merc'hed direbech : ur seizenn evit o eured, ur gokardenn da Sul. »

Gwall nebeut ha re atav.

Iskis e oa. Ar c'han e oa ar wirionez ha n'eo ket ar wirionez hec'h-unan. Ar wirionez n'oa ket gwir endra

n'oa ket bet kanet. Mil koef ha mil blev warn-ugent a oa bet kanet eta hag an holl lezennoù a oa da blegañ dezho. Penaos e rankent fichañ o blev, ar c'hoef, ar gern ha stumm ar stolikenn, rak homañ e oa al lezenn gentañ : « Kuzhit ho plev pe kit gant ar foeltr ha gant ar berjelennoù all, aet re vuan, a-vouchadoù, ha n'oa chomet nemet o c'hoef war o lerc'h. » Ha piv en dije kredet terriñ al lezenn ha kas ar person da stoupa da Bloumanac'h pe da Gerbeleg ? Den.

Mari Faoued a zo kemeret,
hag he blev diwar he fenn a vo bremañ troc'het.

*
* *

Chan an hini eo he doa kontet din pa oamp bet er vered.

« Atav o doa bet sachet war blev ar merc'hed, Marc'harid. Er penn kentañ edo an aon ha spontusoc'h eget blev ar merc'hed n'oa ket. Lakaat a raed mantr e kalon ar merc'hedigoù, reiñ o spered da zebriñ d'ar c'hrennardezed. N'ajemp ket d'ar Baradoz. Da welet piv ? D'ober petra ? “Kleuzit ho penn, kleuzit ho penn, merc'hed, ha chomit direbech !” Mezh a oa da gaout evit meur a gantved, Gaid. Ar re n'oant ket bet galvet da sec'hañ treid an Aotrou gant o blev – ha buan, timat mar plij ! – a ranke kuzhat anezho.

— Frizañ ?

— Arabat !

— Tortilhañ, rodellañ ?

— Arabat !

— Kuchoù ?

— Arabat !

— Kuchoù brav ?

— Ar c’huchoù milliget hag ar blev alaouret a vo leun a sarpantet.

« Hag arabadoù all, Gaidig, ha diouganoù dismegañs, komzoù hir ha padus an Nostradamus, katekiz ar gac’herien ziaes. Nag a verc’hed spontet evit dinec’hiñ ar baotred. Ha gwir e oa ? N’ouzon ket. Skrivet e oa e *Buhez ar Sent* hag ar Santezed diantav. Troc’het e oa bet he blev da Santez Klara e Asiz.

— Emañ Sant-Jakez en Turki, hir eo an hent ha pell mont di, met pelec’h emañ Asiz ?

— Den ne rae van, Gaidig, den ne rae van e gwirionez. Da-c’houde e oa bet troc’het he blev da Santez Katell peogwir n’edo ket he soñj e fortunioù ar bed-mañ. Na te kennebeut all ? Gwell a-se. Santez Roza he doa troc’het he blev hec’h-unan e kêr Lima. “Petra dimezell ? Ar rouejoù-se a servij da bakañ an eneoù ?” Ha skrivet e oa bet buhezioù an holl santezed all na raent seurt war-bouez santifiañ e-pad an deiz ha troc’hañ o blev pe gwalc’hiñ anezho gant dour huzil bep mintin – ec’h ! –. Selaou c’hoazh : nav bloaz e oa bet Santez Marc’harid e Montepulciano hag an aour hag ar perlez a lugerne e-touez he blev plañsonet met... n’oa ket eürusoc’h evit kement-se.

« D’an neb a glevo, e korn an oaled.

« N’ouzon ket penaos e c’hellemp padout, Gaidig. Klevet a raemp, selaou a raemp aketus ha tevel pe lavaret ar c’hredo, ar gloria, an *de profundis* ha brezhonegajoù all tud an Iliz. Santezed dinamm, sioul-logod. Edomp

dindan lagad an tad ha gourdrouz en e lagad, en e abrant, en e viz. Soñjal a raemp er sarplantet hag en dour huzil, er blev troc'het ha tevel a rae an aon, gouestad. Terriñ a reer ar spontoù bras gant ar spontoù bihan, bez soñj. Bemdez-c'houloù e welemp hor mamm, hor mamm-gozh hag o c'hoefoù kaer. Penaos ober mod all ? Plac'hig an ti all a oa o vont e koef dija, koef ha laou en he fenn, prestik e vije hon tro. Da c'hortoz e vezemp o fichañ rodelloù kaer hor poupig koant, plañsonat a raemp e vlev, rannañ anezho war e dal, kribañ anezho kempenn ha kuzhat. “O ! Pegen... dereat !” Ne vo gwelet kuchenn. Ampeziñ, rikamaniñ a veze desket deomp neuze ha lakaat uhel ar c'hoef war hor penn. Dre be du ?

— An hanter eo koantoc'h evit ned oa a-raok !

— Mouchouer, tavañjer ha koefig gwenn, a ra diouzhoc'h ur gwir vleunienn !

« Ar bleunioù ne lavaront ket traoù gros, Gaid, ne grañchont ket war ar re all, n'eont ket d'ober krampouezh war an dour gant ar baotred na da zifoupañ neizhioù gant ar Yannigoù. Ne c'hellont ket. Traoù bresk omp emezo.

— N'eo ket gwall cheñchet, bevañ a reomp e-skeud ar baotred e fraost c'hoazh hag emañ an tu kreñv ganto. Dilun e oa kuzul-klas er skolaj : 10 diwar 20 en deus bet Tudi en trimiziad-mañ ha kalz gwelloc'h e c'hellje ober mar karje labourat ha n'eo ket lostigellat e-touez an droched all. 10 diwar 20 he deus bet Aela ivez : nag a strivoù he deus graet ! Ne fell ket din bezañ ur vleunienn, Chan, ne fell ket din chom da c'hedal Yann-Soudard na Yann-Vartolod.

— Gwelloc'h ar re-se eget Yann-Drotaj !

— Poent krouiñ ar yannigologiezh, Chan, ur skiant a zo ezhomm bras anezhi.